

## Matilin an Dall

Breiziz, va c'henvroiz karet,  
Hirio, siouas, me a zo koz  
Nag a bet gwech em eus sonet  
Da zansal en deiz hag an noz,  
Ha mar plij gant santez Anna  
E klevoc'h c'hoas war an dachen,  
Son skiltruz va bombard velen  
O lakat tud hor Breiz da drida.

### DISKAN

*Me eo matilin an dall  
Ar bombarder taouen,  
A laka 'n dud da zansal  
Dibar va barriken :  
Eun taol sut ! ha souden  
Pôtrek skanv d'an abaden  
Eur bom soun, ha rakial,  
Paotred o fringal ! gê.*

Yaouank e kollis ar gweled....  
An eostik, ma lavarer mad,  
A gan flouroc'h en e gaouet  
Pa vez dallet e zaoulagad :  
An dall a gaerik Kemperle,  
E n'he lochen war ribl an dour,  
Evel an eostik a zoz flour  
Etre an Izol hag an Elle.

Yannik-ar-Japel, em c'hichen,  
A c'hoari gant he viniou.  
Dreist holl pa zun bord e veren  
Evit souplaf e vuzeliou,  
Nag hen a sko, lann va c'homper,  
Gant he zounerezik lirzin....  
Ha d'he heul pa sko Matilin  
Eo mars gwelet penaos e fringer.

Bet oun e Paris, eun devez,  
O sini dirak ar Roue  
Hag hen kouls ha tud e balez,  
Gant ar blijadur a c'hoarze,  
A c'hoarze krenv, a c'hoarze pell  
Hep gallout miret da c'hoarzin,  
O klevout an dall Matilin  
O tistaga toniou Breiz-Izel.

Malo-Korred a Gearf-Ahez,  
Kenta grenadour a Vro-C'hall,  
A veritas klevet ivez  
Sounerez Matilin an dall ;  
A dost, a bell e tiredet,  
Da velet patroum ar soudard,  
Ha da glevet mouez va bombard  
O kana enor ar Vretoned.

Kals all a vije pinvidik  
Ha ganin-me ne jom netra  
Nemet isign va bombardik  
Da c'hounid va zammik bara.  
Met a ze pikol fors ne rann ;  
Me zono keit ha ma vevin  
Ha deiz va maro ne gollin  
Nemet va bombard ha va diskan.

J. QUÉRÉ.

## Julig ar Ververo

Me 'gave d'in, gwech dimezet,  
*Julig ar ververo,*  
N'am ije graet netra ebet,  
*Juliver tonti, juliver tonton,*  
*Julig ar ververo,*  
*Daoulagad a skuil daelo....*

Padal e renkan ober toud,  
Aozha krampoez ha frita youd.

Ar pezh a gavan gwasoc'h c'hoaz,  
Eo pilat lann gant va zreid noaz....

Dimezet 'oun d'eun ever gwin  
A ya d'an davarn bep mintin.

Ar gwin a ev leis e weren  
N'eo ket gwin ruz, met gwin melen.

D'an davarn e ya mintin mat,  
D'ar gêr e teu gwall ziwezat.

Neuze 'kommans al langachou,  
Ar malloziou, ar bac'hadou.

Ne glevan ken nemet — « Kers kuit!  
An ti 'zo d'ip, ar maes 'zo d'it ! »

An dud yaouank, pa zimezont,  
Ne ouzont ket petra 'reont.

C'houi, tud yaouank dizimez c'hoaz,  
'Raok dimezi grit mat ho choaz !...



## BRETONED

*hag a gar soniou, gwerziou ho Pro, kemerit  
koumanant da*

“ **VREIZ** ”

kazetenn sunveziek

15 LUR AR BLOAZ

Skrivit da : ADMINISTRATEUR « BREIZ »,  
13, place du Centre, Guingamp. — C. C. 211.86